




KARTA EMBANN TES

Kevatalder merc'hed-paotred



Unan eus kefridioù [diazeg](#) ar Skol eo gwarantiñ kevatalder ar chañsoù etre ar merc'hed hag ar baotred. An dra-se eo ster melladoù [L121-1](#) ha [L312-17-1](#) Kod an deskadurezh.

Hep stourm ouzh ar stereotipoù, ne c'haller ket stourm ouzh an droukziforc'hañ hag ouzh ar feulsterioù a-enep ar merc'hed.

Diwall a ra TES na vefe skignet stereotipoù en e embannadurioù.

► Evit STOURM ouzh ar stereotipoù jener e vo TAOLET EVEZH BRAS eta ouzh :

1. ar barelezh a-fet niver : pouezus eo, e forzh peseurt teul e vefe (albom pe dornlevr), e vefe kement a merc'hed hag a baotred e-touez an tudennoù, evit a sell ouzh an harozed hag an harozezed peurgetket.

2. liesseurted ar rolloù roet d'an tudennoù : ret eo chom hep stagañ bep tro rolloù gouzañv ha tachennoù an diabarzh d'an tudennoù benel ha rolloù ober ha tachennoù an diavaez d'an tudennoù gourel. Ret eo mont er-maez eus skeudennadurioù hengounel ar baotred hag ar merc'hed, an tadoù hag ar mammoù, hag eus patromoù ar gevredigezh hag ar familhoù (da skouer : n'eo ket atav d'ar vamm da aozañ ar pred pe da renkañ an ti, na d'an tad da droc'hañ al letonenn).

3. liesseurted ar skeudennoù : lec'hiadur an tudennoù, al livioù, an dilhad hag an traezoù stag outo a rank bezañ liesseurt ha neptu e c'hallont bezañ. Da skouer, ne vo ket kambr ur plac'h pe ur paotr kentoc'h roz pe glas bep tro. An dibab livioù ha stiloù a rank bezañ ledan evit chom hep kinnig skeudennadurioù sistematikel (plac'h he brozh roz, paotr e jean ha stammenn c'hlas).

4. an anvioù-gwan staget ouzh an tudennoù : ar merc'hed n'o deus ket da vezañ deskrevet, an aliesañ, gant perzhioù stag ouzh ar gened « koant, bihan, dous, bresk... », nag an darn vrasañ eus ar baotred gant perzhioù stag ouzh ar spered pe an nerzh « gwidreüs, fin, kalonek, kreñv... ».

5. bezañs tudennoù nebreizh : diouzh an dafar implijet e c'hallo bezañ erbedet kinnig tudennoù nebreizh, evit lezel al lennerien yaouank dieub d'en em hevelebiñ.

6. denekadur al loened : dre-vras, el lennegezh evit ar yaouankiz, e vez skeudennaouet an tudennoù benel gant loened mentet-bihan (logod, c'hwen, raned pe amprevaned), tra ma vez skeudennaouet alies-tre an tudennoù gourel gant loened brasoc'h (leoned, arzhed, tigred...). Ret e vo teuler evezh ouzh an tech-se ha kinnig skeudennadurioù liesseurt.

An holl elfennoù-se a roio an tu da :

1. gas war-raok ur preder war ar sevel identelezhioù revel ha war gwask ar gevredigezh a zeu diwarnañ evit ar merc'hed bihan kement hag evit ar baotred vihan (falvezout a reer digant ar merc'hed bihan e vefent koant ha fur, ha digant ar baotred vihan e vefent oberiant ha kalonek).

2. adtalvoudekaat skeudenn ar merc'hed er gevredigezh evit reiñ tro da ledanaat dazont micherel ar merc'hed bihan.

3. reiñ tro d'ar baotred da gomz eus o santadoù hag eus o fromadennoù.

4. aesaat ar vignoniezh etre merc'hed ha paotred.

5. aesaat rannañ ar c'hargoù etre tud en oad er familhoù.

Ezhomm o deus ar merc'hed eus patromoù kreñv evit krediñ ledanaat o endroioù ha tapout fiziañs enno.

Ezhomm o deus ar baotred eus patromoù tud kizidik evit bezañ gouest da gomz muioc'h eus o fromadennoù hag eus o santadoù. Rak-se, kentoc'h eget skignañ skeudenn ur gevredigezh digevatalek en embannadurioù, eo pouezus kinnig patromoù all, hag a zigor an nor d'an ijin hag a ro an tu da bep hini da gavout e hent pe he hent.

► Dre forzh KINNIG INGAL saviadoù hep stereotip eo e vo DISPENNET ar stereotipoù.

Evit mont pelloc'h, dafar en Eduscol :

<https://eduscol.education.fr/document/4999/download?attachment> • <https://eduscol.education.fr/document/12988/download?attachment>